



Güerz

AN

DEMEZEL LA FAILL

PEHINI A VOA BET DIVEZIET.

Var ton : *Va Flaneden zo caled.*

Er guêr demeus a Doulous, eur guêr gaer eus Franc,
E voa eur famill demeus ar brassa esperanç;
Mes ar Maro didruez e devoa anlevet
Ar vam vad carantezus d'he merc'h muia caret.

An Autrou La Faill eta, chommet intaon, sivoas,
Gant e verc'h yaouanq Clemanç, oajet a zeitec vloas,
N'en devoa nep sonch nemet d'he renta evurus ,
O tonet d'e demezi da un den vertuzus.

Etouez an oll Autrounet voa ouz he darempret ,
Constanç gant calz plijadur e devoa preferet

Ar c'habiten caer yaouanq hanvet Georch a Garran ,
Brava den eljet güelet , hep tamal nep-unan.

E zad voa contant meurbet pa vel o c'harantez ,
Hac a zonch o demezi hep nep dale memes.
Ar c'houpl yaouanq-mâ eürus , ar joa en o c'halon ,
A ze porde gant hast vras deiz caer o union.

An téodou fall a deuas da zrouc comz dioute ;
Mes daoust d'an oll deodadou , estim voa evite.
Vertuzus e voant o daou ha christenien güirion ,
Savet e scol ar furnez hac er Religion.

Clemanç a voa ar gaera eus an demezelet
Demeus ar guér a Doulous a voe biscoas güelet.
O daou e voant eur güir scouer demeus ar yaouanqis ,
Ha dign eus an oll boneur elfet receo da bris.

An deiz memes ma tleye Georch ober ar goulen ,
Eul lizer eus ar Ministr zo erruet souden
Hac a ordrene deàn bea prest en instant
Da vont d'an Indes hep manq e penn e rejimant.

Cetu eta distrujet esperanç o boneur !
Allas ! ne zeus evite bremâ nemet malheur....
Georch a felveze deàn , qent eguet partial ,
E vije grêt an eured eno hep manc ractal.

Mes tad Clemanç a lavar neuze dê gant rôson :
Yaouanq oc'h , va bugale ; sonjit-ta afêçon
Penos abars vo daou vloas , Georch , c'houi a vo distro
Demeus an Enezeou evit atao d'hor bro.

Georch voa disesperet oll , n'oa qet mest dioutan ;
Gant eul lagad truezus hac eur sonch voa ennân ,
E ro d'entend da Glemanç en devoa eur c'hoant vras
D'ellout e antreteni a gostez ur vech c'hoas.

eus embêr da anter-nôs hac hep manq d'ar jardin,
illimp da viana an nerz eus hor chagrin.
Ia, eme Clemanç , m'en em gavo ganes,
Evit caout ar boneur trist da vouela assambles.

An tad n'en d'oa qet güelet ar sin o devoa grêt ,
Rac gant an druez oute voa troublet e speret.
D'an tol eus a anter-nôs ha Georch hac e Vestrez
En em gavas er jardin da hirvoud assambles.

Meurbet e crenent o daou , hep ellout prononç guer ,
Qer bras e voa o glac'har hac o oll disesper.
Da azeza e yezont neuze var ar glazen ,
O tont d'en em vriata , mantret gant an anqen.

Oh ! eme Georch da Glemanç , homâ zo calonad !
En instant eus hor boneur rancout en em güitat !
Eur güivoud aziouc'h o fenu o c'hurune eno.
Allas ! rentet voant qer trist evel daou zen maro.

Qerqent al loar a darzas gant eur gaerder meurbet ,
Hac he c'hemeront da dest d'o c'harante barfet .
Mercomp , emeze , an heur ma sellimp ouz an êe ,
Ma vezo hon daoulagad troet varzu Doue.

Clemanç , va muia caret ! lavar din , me as ped ,
E cari mad ac'hanòn qeit ma vimp separet .
Ia , Georch , dirac Doue , me en tou did amâ ,
Va c'halon vo did atao bete'n heur divea .

Va c'harantez evidout , Georch qèz ! a zo qer bras ,
Mar credan , ma ven maro , em be ar boneur c'hoas ,
Gant eur poc diganes te , da zistrei var ar bed ,
Rac demeus da garantez eo carguet va speret .

Georch , et bâr eus e voneur , en em strinc d'e daoulin ,
En eur bocat da Glemanç ; hac evit ar peurfin

E lavar : Va C'hlemanç ! ret eo n'em separi ;
Na ellàn mui resista ouz un arvest quer cri.

Pêvar bloas voa tremenet abaoue an nôs-se,
Pa ziambarc Georch en Brest, hac e parti neuze
Da gaout e vam da Baris, comz ra dei ouz Clemanç,
Objet e oll garantez hac e oll esperanç.

Pa voan erru, emeàn, duont ebars er ru,
Ilis Sant-Jacques-ar-Prat a voa stignet en du ;
Diouc'h-tu en poul va c'halon evel un tol contel
Am eus sanctet am c'hlaze, vel p'ajen da verval.

Ar vam baour n'ell mui cuzat ouz he mab maleürus,
Pini voa oll glac'haret ha meurbet truezus,
Penos e voe discrifet da Glemanç voa lazet ;
Ar pez en d'oa-hi rentet e stat disesperet.

Goude beza, emezi, bet pell-amzer en caon,
Clemanç evit e zad quer e devoe calz a aon,
Rac güelet rë e verc'h paour gant ar glac'hар bemdez
O voassât hac o qemer an hent demeus he bez.

An Autrou La Faill neuze d'e verc'h a lavaras :
Clemanç paour ! da c'hlac'hар vras am dezol calz, allas !
Te hepken a ell renta rest va deiziou eürus :
En han' Doue ne deu qet d'am renta maleürus !

Clemanç, eguis ur verc'h vad, en em stlap d'e zaoulin,
Hac a deu da implori ar Vadelez Divin.
Oh ! va zad paour ! emezi, pardonit, me ho ped,
An abec eus ar glac'hар gant pini oun brêved.

Me bedo Doue bemdez evit Georch, emezi,
Hac evidoc'h, va zad quer !.... me ho pèd d'am c'hredi.
Trec'hel a rìn d'am zourmant.... Contit atao varnòn :
Ho renta eürus, va zad, vo joa vras evidòn.

Dle bien, va merc'h , emezàn , goulen digant Doue
Ma rz da gaout da bried Proculor ar Roue :
Au Autrou Servins en deus goulennet ac'hanout ,
Ha nemeus, bete vremâ , comzet ouz se ouzout.

Qerqent m'oe grêt an eured e c'hejont da Baris ,
Ha Clemanç a goeas clân bremâ e zeus tri mis.
Dec'h divea e varvas , hirio eo enterret :
He c'horf paour a zo bremâ o repos er vêret.

Bez confianç en Doue , va mab qèz , me as ped ;
N'am rent qet maleüruez e qeit ma vin er bed.
An amzer a zigresco da c'hlac'har , m'en assur ;
Rac te zo mab aféçon , den leal ha den fur.

Georch , goude clêvet e vam , dezi a lavaras :
Me zo un den maleürus , certen , mar boe biscoas ;
Mes , va mam guèz , emeàn , n'ho pezit nep angen :
Va c'hundu a vo atao hini eur güir gristen.

Vardro an abardaes e qemer calz arc'hant ,
Ha pa zeo deut nôs teval , e sorti sioulamant.
Redec a ra d'ar vêred da gaout ar gardien ,
Hac e tifun aneàn hep dale nep mui qen.

Emâ voe spontet meurbed hac a goll a gourach
Pa gléo proposi deàn eur c'hrim , eur sacrilach.
Georch a c'houlen digantàn renta deàn Clemanç ,
O tisqueuz eur yalc'had aour evit e recompaç.

Var e refus , e zeo Georch rentet disesperet ;
Anter varo , ouz e dreid e zeo en em stlapet ;
Crial ha yudal a ra , qen a deu an touller
Da accordi d'e vennat , p'er güel en disesper.

Al loar a sclêrijenne an torfet horrupl-se ,
An arched a zo souden tennet demeus ar be ;

Mes d'ar c'henta tol morzol evit en digueri,
Georch a leusq ur griaden horrupl ha meurbet cri.

Pa voe digor an arched, e vel bisach Clemanç;
Ne voe mui mestr dioutàñ, ha diouc'h-tu ec'h avanç,
Hac e poc dezi ractal, en eur grial ene :
Lavaret e poa eur poc as rentje en bue.

Clemanç a flach hac a leusq un huanad spontus
Hac a ra var Georch Garran un effet spouronus;
Mes hep dale en em gav deut ennàñ e-unan,
Hac e tenn eus an arched e Glemança buan.

Cass a ra Clemanç gantàñ. An touller gant glac'har
A anter an arched gollo hac a rench an douar.
Mes pemp bloas antronos-se ec'h erru var ar be
Pried Clemança La Faill evit pedi Doue.

An Autrou hac an touller, o daou prederiet,
A zo bet en un instant spouronet bras meurbet
En eur velet tost dese ur vreg o sell outo :
Oh ! anavezet e zeo.... Clemanç neo qet maro.

An Autrou Servins qerqent a leusq eur griaden ;
A goste deàñ e voa semplet ar gardien.
Clemanç iveau a grias, hac o daou he güeljont
Oc'h antren en eur c'harros hac o tec'hel calz pront.

Antre nos, dre ordrenanç, voe digoret ar be,
Hac an arched voe cavet gallonteret ene.
An Autrou Servins neuze a yas hep dale pell
D'informi a guementse Ministr eus ar Brezel.

Epad ma tremene ze, Itron Juli Garran,
Un Itron eus ar gaera a voa var ar bed-man ,
Pini voe en Enezi bet gant Georch demezet ,
A deu da gambr an Autrou, hac hi disesperct.

Pemzec dez goude galvet dirac ar barnerien,
Voe confrontet ouz Autrou Servins eno souden.
Estonet bras e voe hi o tonet d'e glèvet :
Ne vouie petra respont, qement voa sebezet.

He zad a voe qemennet da zont d'an tribunal :
Ha d'an hevelidiguez e vouel dourec ractal.
Ne vouie petra respont ouz an hini a sell,
Hac a nac'he fermamant n'oa qet hi e vuguel.

Ar varnerien sebezet, n'ouient petra sònjal,
Qer troublet en em gavent; ze voa dreist ordinal.
Hi a gontas e buez, e voa orfelines,
Hac e d'oa hed e buez habitet an Indes.

Un act a voe produet hac a zescas ractal
Penos e Pondichery Juli eus a Merval
A voa vit güir eureujet d'ar c'horonal Garan :
Güelet a rit, emezi, eo güir a lavaràn.

An Autrou Garan a gred eo êchu an affer,
Pa antre en tribunal ebars en bêr amzer
An Autrou Servins, gantàn dre an dorn eur buguel,
Hac a denn varnàn dre oll demeus an oll a sell.

Qerqent an Itron Garan a zant un dorn bian
Etre e daouarn dezi, hac e tistro buan....
En anavezout a ra, hac e cléo aneàn
O lavarat tristamant : eur poc dìn, va mamàn !

Ar Vreg hac ar Verc'h o doa bete hend resist.,
Mes ar Vam, dre nerz natur, zo en em drahisset.
An Avocat a c'houlen ma vo torret eno
Eur briedelez êchu dre effet ar maro.

Ne c'houlennit qet, a gri, ma vezo déc'h rentet
Ar pez oc'h eus oc'h-unan d'ar bez abandonet !

Lezit eta ar vreg-mâ d'an den he delivras ,
Hac a zo realamant penn-caus ma zeo bet c'hoas.

Qementse voe inutil. Clemania a c'houlen
Antren bars en eur gouent ; pellet voe he feden.
Eur jujamant solanel a deu d'e c'hondaoni
Da gaout he fried qenta , da veva en e dî.

Un deves benac goude ec'h erru en effet ,
Hac hi güisqet en güenn-cann ha meurbet dislivet.
En eur antren er salons , qement voa en em rench ,
Hac e cuez reud ha sclasset dirac oll var ar plench.

En em hasta a rejot da rîi sicour dezi ;
Mes n'oe nemet vit clêvet ar c'homzou-mâ quer cri :
Digass rân déc'h , va fried , ar pez ho poa collet....
Mervel a ra var ar plaç , en em ampoesonet.

An Autrou Garran rentet en eur stat an trista ,
A receo eus e vam baour soignou eus ar brassa ;
Mes daoust da guementse oll , antronos e varvas ,
O henvel e Glemania , goude un drubuill vrás.

FIN.



E Montroulez e ty LÉDAN e traòn ru ar Vur.